


Ar Paourkez-Iverzoniad

GWERZ-IVERZONEK

Da Niena Una O' Luachre.



Tud vad an ti-man, m'ho ped,




n han Dou-e, La-ret eun draik d'eur paotr



diz-an-ve 'Man ket ar be-leg, an tad



Green a-ma, me gar-fe kle-vet eur gir



di-gant an.

I

— Tud vat an ti-man, m'ho ped, 'n han Doue,
Laret eun draik d'eur paotr dizanve;
'Man ket ar beleg, an tad Green aman?
Me garfe klevet eur ger digantan.

II

— Deut mat oc'h, paotrig, an tad 'zo er gêr,
Ezet eo gwelet an tad misioner,
Nemet red gortoz, ma 'z in da welet
Ma 'man e-unan, d'ho tigemeret.

III

Antreet ar paotr; an ti zo goullo;
Trouz e dreid dason iskis er zalio,
En eur gambr izel, yen ha stummet fall,
Aezet eur beleg 'n eur c'horn tenval.

IV

Evit kovesât e holl bec'hejou,
Ar paotr daoulinet lar e bedennou,
Sko war e beultrin d'ar « mea culpa »
Hag a vouez izel a gomz evel-ma:

V

« Evit Iverzon ma zad zo maro,
Ma breudeur ive, 'n eur stourm 'vit ar vro;
Eus hon tiegez chomet ma-unan
'Vit mervel ive, me ya d'an emgan.

VI

« Ter gwech aboe Pask toui am eus gret,
'Vit c'hoari, eur wech, an ofern manket,
Dirak be ma mam, 'vel ma tremenen,
Dre hast 'm eus ankouet, eur vech, ma feden.

VII

'M eus kasoni 'bet ouz roue 'r Zaozon,
Mes dreist pep tra 'r bed, me gar Iverzon!
Breman ho pennoz, ma zad, reit d'in-me
Ma 'z in da vervel, ma ve youl Doue.

VIII

Ar beleg zo mut, mes eun drouz souden
Sko ar paotr, a zell mantret gant anken;
Kouët sae ar beleg; gant e chupen ru,
Eun ofiser zaoz diskouez e zrem du.

IX

Ru-tan e lagad, elec'h eur bennoz,
'Vel ki kounnaret, e foueltr eur malloz:
'Vit hon mad, paotrig, te zo deut aman.,
Rak eun heur hepken te 'teus da vevan.

X

Sell 'ta war ar ster; 'n hon bag, chadennet,
Eman an tad Green, ma n'eo ket krouget.
Me zo mestr an ti en han' ar roue;
Ra vo pep treitour tapet evelse!

XI

Lazet gant ar Zaoz, ar paotr zo maro,
E gorf 'zo kousket 'n eur be dizhano;
Tud a vev en peoc'h 'n ho ti laouen,
Bep noz evitan laret eun beden.

GWELTAS.